



HISTOR ADMIRABL

EUZ A VUEZ

SANTEZ HELENA

Var ton : YAN GUERIN.

C. G. R. M.

Brema/fell din discleria
 Ar vuez Santez Helena :
 Bezit attentif d'he c'blevet,
 Ho calon sûr a vo touchet.

Clêvet a refet e buez
 Carguet eus a dristidiguez,
 Hac ar matir e deveus bet,
 Hac a zo ganti c'hoarvezet.

Me lavarò d'ec'h pen-da-ben
 E voa hi caëra femeulen
 A guemen a vije cavet,
 Gant ar bed oil voa enoret.

Beza voa 'vrassan qualite,
 Pa voa hi merc'h da eur roue :
 Rac merc'h voa d'ar roue Anton,
 E Constantinopl voa e drôn.

Pa voa Pap e Rom sant Clement,
 Ennes a voa eus e c'herent,
 E voe bars er bed-mâ ganet
 Er blaves pevar c'hant ha dec.

Goude an Incarnation
 A Jesus, hon roue guirion,
 Er guær deus a Constantinopl,
 Hac estimet bràs gant ar bobl.

Pa voe en oad a bemzec vloas,
 He mam diganti a varvas,
 Ma fallas d'he zad e c'havet
 Evid ma vije e bried.

Mont a eure da gaoud ar Pab,
 Hac en esper caout e c'hrat,
 Evit caout e gonsantamant
 Da zimezi d'he verc'h yaouanq.

Ar Pap neuze pa er c'hlévas,
 A respont gant eur horror bras :
 Pelec'h m'ar c'hristen var ar bed
 A guemerfe e verc'h da pried ?

Gant an ilis eo difennet,
 Ha gant Doue eo ordrenet,
 Na vezo james eureujet
 Eun tad de verc'h james nepred.

E ve dimezet eur vec'h d'he zad,
Ennez zo eur c'hrim execrapl ;
Eur c'hrim a enep ar lezen
Siouaz ! etouez ar gristenien.

P'e devoe clevêt Helena
Ec'h arruje sùr quement-mâ,
Var ar môr en em embarquas,
Hac en Flandrez en em rentas.

Eno pa voe hi arruet,
En eun eclus en em rentet,
Pa voe tost da eun abati,
E commanças son ar c'hlec'hi.

Neuze an oll leanezet
A voe querquent bras estonet
O clevet ar c'hleyer o son,
Hac int mont oll en orêson.

Hac int mont da sellet neuze
Piou a voa êru er c'hontre,
Mar remerqjont eur femeulen
A zeue d'ho c'haout pen-da-ben.

Mont a rejont en procession,
Gant respect a devotion,
Evit monet d'he rencontri,
Gant eur joa vras d'e saludi.

Ha pas velas hi aneze,
E voe estonet bras ive,
Hac oc'h o guelet a vanden
O tont d'he rencontr evellen.

Neuze resevjont anezi,
Ha conduet d'an abati ;
Rac guelet a rent oll certain,
E care an Autrou souveren.

Mes na chommas qet'f'pell gante,
E chenchas timat a gontre
Dirac ar roue Catebron,
Eun den cruel a dirêzon.

Mont a eure var bord ar môr
Evit sovetei e enor,
Hac e pedas merdaidi
Mar plich ganec'h va embarqi.

Eun dra derrupl a erruas
Pa voant en creiz ar môr glas,
Rac an dud oll a voa lazet
Gant ar c'horserrien arraget.

Exceptet gant Helena,
E voa eur femeulen ar gaëra ;
O sonjai cavet e guerc'hdet,
E voa hi ganto reservet.

En orêzon en em laquas,
Da Jesus en em recommandas :
M'ho ped, va Jesus, va roue,
Conservet va virginite.

Pa voa achuet e feden
D'hor Zalver Jesus evellen,
Eun tan eus an ee a goesas,
Al lestr hac an dud a longas.

Hi voe preservet gouscoude
Gant eur planquendre c'hraçDoue,
Ec'h arruas er rivier Sign,
E quichennic bord eur jardin.

Ar rivier 'ye hete Londrez,
Hac eno e voa eur verjez,
Hac eur feunteun gaër a gavas,
En e chichen e tisquizas.

Ar roue Herri e guelas,
Bars en eun dristidiguez vras,
Azeet etal ar feunteun,
Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostat a râs neuze outi,
Hac e c'houlennas diganti :
Livirit din presentamant
A belec'h oc'h merc'hiq yaouanq.

Me zo eus a Constantinopl,
A guerent pinvidic ha nobl,
Hac a zo amâ achappet
A dre daouarn ar barbaret.

Ah ! va c'halon a fazin din,
Rac naon e meus, ne allan mui ;
Pelle bras z'o n'emeus, débret tam
Ha va c'halon em c'hreiz a rann.

Ar roue Herri p'e c'hlévas,
D'e aumonier a gommandas
Monet pront da guerc'hat dezi
Peadra 'vit e zoulagi.

Neuze en e c'hassas gantâ
Ebars en e dy da loja,
Hac o tont d'e recommandi
Evel uaan a dud an ty.

Goude-se e voant demezet,
Souden e voe grêt an euret,
Hac a fest a badas gante
Betec an nombr a ugent de.

Daou vlaves antier ez int bed
En o slijadur assuret,
Qen en em gavaz douguerez,
Neuze e devoe goal vuez.

Digant e mam-gœr, ar Zantez,
E devoa cals a paourantez ;
Herves ma rapport an histoar,
E devoa calz deus a c'hlac'har.

Ar roue Herri a yas timat
Da gaout tad santel ar Pab,
Evel m'en doa recommandet,
D'ar gombad ouz ar Sarrazinet.

Lezel a eure en secret
Tri verq er guer deus e gachet :
Rei ras unan da Helena,
Eun all da Vari Clocestra.

An drede neuze ar roas
D'ar c'hont a voa e vignon bras,
Da bini a recommandas
E bried gant affection vras.

Glac'har vras a voe er pales,
A lavaret adieu assembles,
Hac epad eiz vloa varnugent
N'en em velin sur e nep hent.

Helena e devoa ganet
Daou vuguel a voa cœr meurbet ;
He mam-gær a roas da gredi
Penos e devoa bed daou guy.

Ar roue Herri pa glevas,
A voe certain estonet bras,
O clevet e devoa ganet
Daou guy evelse e briet.

Neuze a voa c'hi condaonet
Da gaout e brec'h deo troc'het,
Hac amaret e bugale
Unan dezi a peb coste.

Ambarquet voe voar ar môr bras,
Ebars le Breiz e tisquennas,
Al lestr en devoa e digasset,
Da Londrez a zo retornet.

Cri vije 'r galon na voelje,
Oc'h e guelec nep a vije ;
O rei da zena d'e bugale,
Hac hi prest da vervel digante.

Da gousquet pa en em laqas,
Daou leon deus ar c'hoat e teuas
Hac a gassas an daou vuguel ;
Quement-mâ certen voa crael !

Eun Ermit a voa neuze 'r c'hoat,
Ha dious ar c'hri e zeuas timaf ;
Hac a gavas an daou vuguel,
Etre grifou daou leon cruel.

Unan ané Bric a hanvas,
Eguile Martin a c'hlavas ;
O daou e voant gantan maguet
Epad c'hoesec vloas assuret.

Ebars epad an amzer-mâ
E voe e Naonet Helena.
Hac eun hostises a gavas,
Truez outi a gemeras.

Chom a eure da zervicha,
Ebars an ty voa 'n disterra ;
Dispriset voa gant pepini,
Laquet voa da doreha listri.

Ober a re gant dilijanç
Hep na rebel na repugnanc,
Quement a ordrenet dezi,
Eno re oll hep contraignî.

Guelit amâ greg eur roue
Carguet demeus a pacourante,
Rentet qen humbl a qen izel
Dirag ar bed universel.

Sellit breman 'n humilite,
Hounez a blich da Zoue,
Rac an humbl a zo exaltet,
Hac ar superb zo discaret.

Ar roue Herri a distro Rom,
Ha gantan ar roue Anton,
E arruas en e bales
Ebars er gær eus a Londrez.

Allaz ! eno pa errua,
Ar c'hont Gloucester a gavas,
Ha goulen neuze digantâ
Peleac'h voa eat Helena.

Nao messenger voa digasset
Dirag ar roue da lavaret
O doa digasset peb a lizer
D'ar c'hont Gloucester, a dra scler.

Mes eun all a zeuas goude,
A lavaras ar virione,
Penos a voa bet trahisset
Gant ar rouanez cöz assuret.

Ar rouanez cöz zo condaonet,
Da vezan en beo losquet,
Abalamour ma e devoa
Laquet trec'hi brec'h Helena,

Me lavaro d'eoec'h ar recit,
An daou vuguel hag an Ermit,
Ha pennos voa an disparti
Ebars er c'hoat gant eals a gri.

Aan Ermit var bord ar rivier
A yeas gant a daou vuguel,
Aman, emezan, o qivis
Ganen d'am zy ho tigassis.

An daou vuguel a respontas
D'an Ermit oute pa gomzas :
N'en dê quet choui 'ta, Ermit mat,
Eo a so a dra sur hon tad ?

An Ermit neuze a lavaras,
Deze gant tristediguez vras :
Allas ! m'ho cavas aman lezet
Etre bleïzi ha leonet.

Ha gant truez m'ho tigassas
Ho taou ganen d'am ermitach,
Hac emeus ivez ho maguet,
Hoc'h elevet hac instruct.

An daou vuguel a lavare
An eil d'eguile aneze :
Pa n'en dê an Ermit hon tad,
Deomp-ni bremâ da glasq hon mad.

An Ermit a voe trist meurbet,
Pa o c'hlevaz o lavaret
E zajent, allas ! da glasq o mad,
Pa na voa qet en voa o zad.

Pa voant o discours evelse,
Erruon merdaïdi ene,
Bremâ ez eus c'hoësec vloa
E leqezomp amerdaïdi ene.

Gant anquen vras digonsolet
De daou vuguel devoa collet,
Ne devoa brec'h nemet unan
Da zicour daou vuguel bian.

Neuze e lavaras Martin :
Bric, va breur, deomp bete 'r fin,
Elec'h maplijogant Doue hor c'has,
Macavimphormameurvech c'hoas

Merdaïdi, ni ho suppli,
Plijet genoc'h hon ambarqui
Ma zeomp en bano Doue
Da glasq hor bro hac hor c'hontre.

Ar merdaïdi a respontas
D'an daou vuguel pa o c'hlevas :
Deut en hon lestr hac ambarque,
Ni ho laquaï en douar assuret.

En Allemagn ec'h arrujont,
Hac arc'hant dezo a rejont ;
Ouspen a rejont da leina
D'an daou vuguel, gant cals a joa.

En Bavier, pa voant arru,
E zeont ho daou a ru da ru,
Ma ho guelas ar rouanes
Ebars er ru deus e fales.

Ma gommandas d'e messenger
Mont da greer'hat an daou vuguel,
Rac quen caër oant evel an de,
Clorianda o admire.

Digasset oant neuze dirazi,
Roet e voe deze da zibri ;
Neuze evel tud affamet
Ne squizent o tibri o boëd.

Re hir ve ma confent antier
Ar brezel voa er bro Bavier,
Mes beza voant victorius
An daou vuguel, dre c'hraç Jesus.

Martin a voa eun den vaillant,
Hac ebars er gombat sanglant
Laha reas cals a Zarrazinet
Ha cals deus an Turquianet.

An Itron Varia Bouloigne
O sicouras sur an deiz-se,
Hag evit caout ar victoar
Dre c'hraç Jesus voar an douar.

Da Dour e teujont ac'hane,
Eur gær so en Tourene,
Sant Martin a voa aumonier
Da rei soulach d'ar beorien qer.

O mam ivez a erruas
En tour gant eur baourante vras,
Pa voa Martin o tistribui
An aluzon da peb hini.

Goulen a eure diouti,
Ha deuas da zellet outi :
Pe a lec'h oc'h-hu deut amâ ?
C'houi n'en doc'h qet eus ar vro-mâ.

Commanç a ra neuze e galon
Da zonet d'e biquat qen dou,
Neuze e teuas sonch dezâ
Ebars en e vam Helena.

Diaguent en devoa clevêt,
Evel mâ hon eus rapportet,
E voe troc'het eur vrec'h dezi
Ha en dont da sonjal enni.

Neuze en em anavejont ;
Gant joa vras en em saludjont :
Autrou Jesus, eme Helena,
Aa bugale gues a vel'an.

Ne zeziret qet quant mervel,
Nemet guelet va daou vuguel ;
Ma bugale, meulomp Jesus,
Zo bet 'n omp andret trugarezus

Autrou Jesus roue an Trôn,
Homâ zo consolation,
Da eur vam e devoa collet
He daou vuguel e deus cavet.

Pebez joa ive evithi
Golet c'hoas ar roue Herri :
Ar prins-se qen madelezuz,
Qen humbl ha qen carantezus.

O Doue, emei ma fried,
Goel-bell e c'homp bet separet
An eil ziuoz ? dious eguile ;
N'em goelfet mui pell eu bue.

Ha c'houi ma zad, prins meurbet
'Vel pa vijen a re 'n ho ty, [cri,
Oc'h eus bet occasionnet
D'ar poagno bras a meus zouffret.

Adieu d'ec'h oll a lavaran
Galvet hon prim d'en em rentan
Bremâ en pales ann envo
En récompans d'em oll poanio.

Adieu, ive, va bugale,
Mont a ran breman en han'Doue,
Hø pet ac'hanon sonj a memoar,
Va bugale guer, var an douar.

M'em bezo sonch ac'hanoc'h ive
Pa vin en rouantelez an ee,
Evit ma veisimp oll assambles
Er Barados gant an æles.

FIN.

(Propriété.)



CANTIC AR BURETE

Voar eun ton nevez.

Clevit oll, yaouanquis, avisou excellant,
Tennet deus ar Scritur ar Zent, an tud savant.
Vit dont da gonservi antier ar burete
Hac ive ho brud vad e mesq tud ar c'hontre.

Eur paour gant he enor so muioe'h estimet
Vit nobl ha pinvidic m'ar bent dishenoret,
Rac p'an defe eun den oli vado ar bed-ma,
Birviquen an henor collet n'all prena.

Hoguen mam an henor eo a guir burete,
Vel mam an dishenor eo a lubrite :
Nep so chast a nevo istim oll dud ar bed,
Hini Doue, ar zent, an ælez biniguet.

Vertu ar chateste a neveys en avanç
A dalec ar bed-ma ato he recompanç,
Vel ma meus lavaret, mes he ini brassa
Vo gloar ar barados hep biquen finissa.

Divoallomp hon sellou, dorojou ar galon,
Hy ra antren ebars a bep sort sonjeson :
Conduomp aneze gant eur vodesti vras,
Evit conserv bepret ar vertu hac ar c'hraç.

E toues ar vugale, vel e mesq an dud vras,
Ar fe, he hon amzer, so divalo siouas !
A boan e zeo deze gouzout he *Be ha Ba*
Ma canont chansoniou demeur ar re loussa.

Disquomp oll, christenien, ar voyen da viret
Ar burete a gorf hac ive a speret,
Rac balamour ma zeo eur vertu ar gaera,
An drouc-speret a glasq pepret he distruja.

Satan a zo, cuspenn, fin a traytour meurbet ;
En dro deomp emedy gant he bechou stignet,
Evel eur bleiz, nos de, ho reded an devet :
Divoallomp, me o ped, rac beza devoret.

Imitomp ar Verc'hes, Suzanna ha sant Yan,
En eur guir, an oll zent evit beza divlam ;
Hac ho Salver Jesus, sourcen ar burete,
Er gloar hon curuno, hed an eternite.

En tuont, quemeront squouer deus a verzerien,
A heuillas er bed-ma, oll, hent ar binijen :
Na neveys quet moyen da c'h nit ar victoar,
Ha da veza, eun de recompanset er gloar.

A hent all, re hir ve donet da rapporti
Histoar an dud impur, ha re an dud impi.
Balthasar d'r er maro a so bet prompt squët,
Ha Sodom ha Gomorh gant tan an ên devet.

Evit fin pelleomp deus an occasion ;
Ra vo hon meleour, Samsom ha Salomon :
Ar fura, ar c'hrenva a so deut gouëa :
Ha nin a gont beza fermoc'h bars en hon zâa ?

Na neo quet necesser deomp e n'em separi
Na demeus hon c'herent na demeus tud hon zy,
Vit evel hermitet, monet bars er c'hoajou
D'a ober pinijen ar rest deus hon deïou.

Er bed, gant graç Doue, ha gant bolante vad,
Nin a cavo moyen vit en em sauvetaat :
Tehomp deus ar pec'het, heuillomp an aviel,
Vel Jesus ; vit ganta mont d'ar gloar eternal !

Guerc'hes Vari, Mam vad, sicour ar pec'herien,
Divoallet ac'hanomp deus adversourien.
Gret ma vezimp ato pur, chast ha vertuüs,
Da c'hortos, en envo, ganec'h menli Jesus !

(Propriété.)

Lanhuon, en ty intanvez Ar Coffic.